

DIALOG  
ENTRE  
UN DOCTOR  
A C  
EUR BUGUEL.

---

E BREST,  
E ty LEFOURNIER ha DEPERIERS,  
Imp.-Librer., Ru Royal, N.<sup>o</sup> 86.

T  
XIX  
III





## DIALOG

Etre un Doctor hac eur Buguel.

*An Doctor.*

BONJOUR, Mabic : pelec'h it-tu ?

*Ar Buguel.*

Da glasq Mæstr e zan un tu.

*An Doctor.*

Me a so Doctor, ha mar quirit,  
Me raï scol dec'h, mar em pedit.

*Ar Buguel.*

Bet oun er scol gant Doctoret,  
Ha tout o c'havan borodet,  
O clasq disqui da bep-unan  
Ar pez ne ouzont quet ho-unan.

*An Doctor.*

Petra ne oar an Doctoret ?

*Ar Buguel.*

Meur a dra so ne ouzont quet.

*An Doctor.*

Ha te oar mui eyito ?

*Ar Buguel.*

Mar quirit, ny a zisproto.

*An Doctor.*

Te, da disput oc'h un Doctor ?

*Ar Buguel.*

Ho respont a rin gant enor ;

Ha na oufac'h goulen netra ,

Na roin ræson dec'h anezâ.

*An Doctor.*

Piou en deus crouet ar bet-màn ?

*Ar Buguel.*

Nep a rîr Doue anezân.

*An Doctor.*

Ha te oar petra eo Doue ?

*Ar Buguel.*

Allas ! ne oun quet, na c'houi ive :

Dre ar feiz deomp oll eo desquet

Quement a so en deus crouet ,

Var guement so eo souveren ,

Da guement so e c'hourc'hemen .

An nep ne sentont quet ountâ ,

Ne vanq jamaës d'o funissa ,

Ouspen ez zeo universel ;

**E**c'hell tout, ez eo eternel ;  
**Mæs** ne ouffe den expliqua  
**Na** renta ræson anezâ.

**O altitudo !** ne ellomp quen :  
**Adoroimp-èn** hep e gompreñ.

*An Doctor.*

**Petra** dle an oll da Zoue ?

*Ar Buguel.*

**E** servicha corf hac ene.

*An Doctor.*

**Peur** na penaos er servicher ?

*Ar Buguel.*

**Pa** ra peb-unan e zever.

*An Doctor.*

**Petra** eo never peb-unan ?

*Ar Buguel.*

**Dever** an oll guitibunan.

*An Doctor.*

**Petra** eo never an Doctoret ?

*Ar Buguel.*

Pratiqua ar mad o deus desquet,

Rac inutil ha coll amser

Eo disqui ar mad hep e ober,

*An Doctor.*

**Petra eo dever er Buguel ?**

*Ar Buguel.*

**Disqui beza un den santed.**

*An Doctor.*

**Peur en em goll eur c'hrouadur ?**

*Ar Buguel.*

**Pa ro de dat displigeadur.**

*An Doctor.*

**Petra ra dezàn mont da goll ?**

*Ar Buguel.*

**Beza re leset en e roll.**

*An Doctor.*

**Pelec'h e tesquer follentez ?**

*Ar Buguel.*

**O hanti goall gompagninez.**

*An Doctor.*

**Piou so dangerus o henti ?**

*Ar Buguel.*

**Nep so sujet da sotoni.**

**Dibaot Buguel a hent tud sot ,**

**Eus ho sotoni na zesq lot.**

*An Doctor.*

**Piou a respont anezo ?**

*Ar Buguel.*

Nep a so Tad ha Mam dezo.

*An Doctor.*

Petra eo never Tad ha Mam ?

*Ar Buguel.*

Miret o bugale divlam.

*An Doctor.*

Penaos ec'h ellont-y e ober ?

*Ar Buguel.*

Oc'h o sugea da chom er guer :

Mar o lesont re da vale ,

E teuint libertin hep dale.

*An Doctor.*

Peur e tleer o instrui ?

*Ar Buguel.*

Dious o speret dre ma teui.

*An Doctor.*

Peur e tleer o c'horrigea ?

*Ar Buguel.*

Pa zint bian , eas da blega.

Faciloc'h eo plega planten ,

Evit na de plega guezen.

*An Doctor.*

Peur et tleer o dimisi ?

*Ar Buguel.*

Pa o deus oat ha faltasi ,

Guell eo abret dimisi merc'h ,

Evit na deo caout queuz varlerc'h .

*An Doctor.*

'An Tad , ar Vam , hac int a dle

Ober stad eus o bugale ?

*Ar Buguel.*

Tad a ra stad eus e vabic ,

En desq da veza map prodig ;

Ha Mam a ra stad eus e merch'h ,

Peur liessa a vouël varlerc'h .

*An Doctor.*

'An Tad , ar Vam , hac int a dle

Rei o madou oll d'ho bugale ?

*Ar Buguel.*

Sotoni vrás ve da un den

Discregui eus tout e voyen ,

Ha rancout goulén goude-ze

E ezomou ous bugale .

Seantoc'h eo goulén oc'h Tad ,

Evit d'an Tad Goulen dious Map.  
 Guelet hon eus meur a exempl  
 Etouez tud cre ha tud sempl,  
 Ar vugale o caç ractal  
 Ho Zad, ho Mam d'an hospital.

*An Doctor.*

Pe etre piou en tieuez  
 Ne vez nemeur a garantez ?

*Ar Buguel.*

Etre Bugale ha Lesvam,  
 Ispicial mar deu d'o blam ;  
 Rac al lesvam ne d'ê quet caret  
 A galon vat gant minoret :  
 Dibaot lesvam a gar ive  
 Bugale all queit hac e re.

*An Doctor.*

Ha te oar micher priejou ?

*Ar Buguel.*

Clevet emeus o doareou.

*An Doctor.*

Peur vez carante entreze ?

*Ar Buguel.*

Pa na zeffot netra deze.

*An Doctor.*

Ha peur, e vanq an union ?

*Ar Buguel.*

Pa vanq dezo pourvision.

*An Doctor.*

Ha peur e vezont e coler ?

*Ar Buguel.*

Pa vanq unan en e zever.

*An Doctor.*

Piou a so cassaüs dan oll ?

*Ar Buguel.*

An diaoul hac eur c'hreg foll.

En un désert eo guell beza ,

Ha caout eno peoc'h da veva ,

Evit n'en deo chom assembles

Gant greg ebet , m'ar d'ê folles.

*An Doctor.*

Hac ar Groagues a gar ar guin ?

*Ar Buguel.*

Eus a enor ne dint quet dign.

Eur Vrec a so custum da eva ,

A bep hent tout ne dal netra ;

Ouc'h peb honnestis e ser dor ,

Hac oc'h peb pec'het e tigor.

*An Doctor.*

Petra servich canna eur Vreg ?

*Ar Buguel.*

Lacât he maliç da redec.

N'en deus serpent dangerussoc'h,

Leon na dragon terruploc'h

Evit eur vrec so en coler ;

Ous e c'hanna so mil danger.

*An Doctor.*

Pelec'h e caffet-hu eur vrec vat ?

*Ar Buguel.*

D'an Eê e renquer mont de ch'erhat.

*An Doctor.*

Nac ar Plac'het, va buguel ques ,

Ha te c'heus oute carantez ?

*Ar Buguel.*

Va zad en deus va c'helennet

Na dostaïn jamæs ous plac'het ,

Rac trômplus int calz aneze ,

Ha collet ar bed-mâ gante ,

O min a so douç eguis mel ,

Hac a zeboch meur a vuguel ;

Mæs ne vezet quet pell ganto  
 E guis ar vestl na dint c'huero.

*An Doctor.*

Petra a ra da gals a dut  
 Diwar o sen caout disput ?

*Ar Buguel.*

Petra ma zeo an dut-se sot  
 Eus a vil malheur clasq ho lot.

*An Doctor.*

Ha te ene plac'h fur ebet ?

*Ar Buguel.*

Nameus quet cals anavezet :

Ar plac'het fur, var a glevàn,

Ne dint quet commun er vro-màn.

*An Doctor.*

Pe da lec'h eta int-hi êt ?

*Ar Buguel.*

Elec'h n'en deus quet a voaset.

Biscoas plac'h fur, fur na voe pell,  
 O henti goas, na ne voe vell.

*An Doctor.*

Ha na dleer quet en em henti  
 Evit caout lec'h da zimisi ?

*'Ar Buguel.*

Dimisi a so permettet,  
 Mæs sotoni eo quemeret  
 Eur plac'h e deus meur a c'halant;  
 Hac eus an oll a so contant:  
 Guell eo guenen caout eur mignon,  
 Evit eur plac'h en donæson.

*An Doctor.*

Ha te c'heus cals a vignonet?

*Ar Buguel.*

Ne ansavan mignon ebet.  
 Ar mignonet eus ar bed-màn  
 So inconstant, var a glevan:  
 Dibaot a zen ne ve tromplet  
 O re fiziout er mignonet.

*An Doctor.*

Pegueit e pad eur vignonach?

*Ar Buguel.*

Bete'n ezom, pas davantach.  
 Nep en deus arc'hant hac a ro,  
 A gueff mignonet e peb bro;  
 Mar deu ezom dezàn goude,  
 E vignonet en disene.

*An Doctor.*

Petra ra nep a brest arc'hant  
Da eur mignon hep caout garant?

*Ar Buguel.*

C'hoant coll en deus hervez fæçon  
Hac e arc'hant hac e vignon :  
Quenderv gompes out pa bresti,  
Ha den ingrat pa c'houlenni.

*An Doctor.*

Na nep a ra un donæson,  
Petra sonch-ën en e galon ?

*Ar Buguel.*

Songeal a ra en devezo  
Daou c'hement mui evit na ro.  
Pane verd ze certenamant,  
Neubeut a zen a rae presant.

*An Doctor.*

Hac èn a so den e nep canton  
N'en deus adversour ha mignon ?

*Ar Buguel.*

Dibaot a zen a so er bed-mâ  
N'en deus er c'har hac er c'hassâ.

*An Doctor.*

Pe dious piou e renquer tremen ?

*Ar Buguel.*

Dious ar bed-oll mar be moyen,  
Rac ne deus den na ell ober  
Ha drouc ha mat gant an amser.

*An Doctor.*

Pelec'h e sao dissaution ?

*Ar Buguel.*

E lec'h ma vanq soumission.  
An dut superb a sav ato  
Eur guerel bennac entrezo.

*An Doctor.*

Na pe ous piou ne renquer quet  
Caout jawæs querel ebet ?

*Ar Buguel.*

Ne gleer caout gant hini,  
Ma na eller quet trec'hi.  
Marc'h a resist oc'h ar c'hentrou  
A ra gaou bras ous e gostou ;  
Ha sot eo den da resista  
Ous nep so creoc'h evinta.

*An Doctor.*

Penaos e fach ar vignonet,  
Na peur e vezont accordet?

*Ar Buguel.*

Divar ar guin peur liessa,  
E custumont en em facha:  
Ha d'ho accordi goude-se  
E renquer caout guin adarre.

*An Doctor.*

Ha te oar iveau eva guin?

*Ar Buguel.*

Re yaouancquic e c'hoës va min,  
Gant an Doctoret el lesan,  
A rai guel usach anezan.

*An Doctor.*

Nep so pedet da eur banquet,  
Ha n'en de èn quet sot ma n'en da quet?

*Ar Buguel.*

Furoc'h e cals mar chom er guer,  
Ma n'a oar eva dre voder.

*An Doctor.*

Petra ra an ini a eff re?

*Ar Buguel.*

Disqui d'ar bed-oll e zoare.

Pa ve secret, mar be mezo,  
 Quement a oar a lavaro,  
 Ha cals c'hoas avizion ouspen,  
 Pa sao e vanne en e ben.  
 Ar paoura tout, evet dezàn,  
 A so pinvidic, emezàn ;  
 Ha couscoude en deveus poan  
 O clasq caout yot silet da goan.

*An Doctor.*

Piou a ra d'an dut guella cher ?

*Ar Buguel.*

Nep en deus joa oc'h e ober.  
 Digant eur mignon eo guell caout dour  
 Evit guin digant un traïtour.

*An Doctor.*

Mar ez pe arc'hant, te effe guin,  
 Evit beza yaouanc da vin ;  
 Mæs n'elles eva nemet dour,  
 Abalamour ma zout paour ?

*Ar Buguel.*

Me nemeus nac arc'hant naø aour,  
 Ha gouscoude ne doun quet paour;  
 Pinvidic oum couls a nicun,

Pa zoun contant eus va fortun ;  
 Ha clêvet ameus e peb lec'h ,  
 Eo guell dour ha bara sec'h ,  
 Evit caout arc'hant leis an ty ,  
 Ma ne contant nep en deus-hy.

*An Doctor.*

Piou a zesir ha n'en deus quet ?  
*Ar Buguel.*

Nep a frip ha ne c'hounit quet.  
 Dibaot eo guelet eur prodig  
 O chom pell amser pinvidic ;  
 Dibaot iveau eur feneant  
 A zestum cals a arc'hant.

*An Doctor.*

Piou so beo hac en desfe naon ?  
*Ar Buguel.*

Nep a chom re bell var e scaon.

*An Doctor.*

Piou ne verit quet a sicour ?

*Ar Buguel.*

Nep a so cre , ma na labour.

*An Doctor.*

Petra ê avantach ar re baour

**Var nep en deus arc'cant hac aour?**

*Ar Buguel.*

**Un avantach a so caér :**

**N'o deus quet aon rac al laér ;**

**Rac ne veler quet al laéron**

**O vont nemeur en o c'hanton.**

*An Doctor.*

**Pelec'h eta e vezont-hi ?**

*Ar Buguel.*

**Eleac'h ma santont eus ganty.**

*An Doctor.*

**Piou so custum da laérez ?**

*Ar Buguel.*

**Nep en deus aon rac paourentez.**

*An Doctor.*

**Ha cresqui a ra ar voyen**

**O gemeret madou an estren ?**

*Ar Buguel.*

**James den ne binvidica**

**Oc'h ober gaou ous e nessa :**

**Ar madou drouc-acquisitet**

**Na brosperont gant den ebet.**

*An Doctor.*

**Nac ar madou destumet pront ?**

*Ar Buguel.*

**D**issilla prest a gustumont,

*An Doctor.*

Hac al laëron a ell miret

N'o daffe quet a boan speret ?

*Ar Buguel.*

Natur al laër eo beza lent ,

Caout aon ha spount pa za en hent ,

E sonch dezan ez eus bepret

Ur re-bennac och e redet .

*An Doctor.*

Pet seurt laëron so er bed-mâ ?

*Ar Buguel.*

Difficil ve o niverra ;

Rac ma ve an oll examinet ,

Nebeut a zen just a gaffet :

Hac ar pez am eston muya ,

Hac a ra poan din da songea ,

Lo ma renter e pep canton

Enoriou dar brassa laëron ,

Hac un nombr bras a re zister

Dirac an oll a bunisser .

*An Doctor.*

Piou a gar enor er bed-mâ ?

*Ar Buguel.*

An oll a so content anezâ.

*An Doctor.*

Piou a ra enor d'e nessa ?

*Ar Buguel.*

Nep en deus carantez ountâ.

Renta enor hep carantez,

So trahion pe traïtourez.

*An Doctor.*

Peur e chench an dut saltasi ?

*Ar Buguel.*

Pæ gresq ar madou en o zy.

Dibaot hini, mar deus nicun,

Na chench humor pa chench fortun,

Ar fortun vrás, an enoriou,

Eus a Sent a ra diaoulou.

*An Doctor.*

N'ac ar re a glasq enoriou,

O publica ho vertuzion ?

*Ar Buguel.*

Dibaot ar yar ne goll e vi,

O cana re goude dezvi,

Ha dibaot den en em bompas;

Na goll e boan oc'h ober vat.

*An Doctor.*

Ha te c'heus joa eus an enor ?

*Ar Buguel.*

Ne glasquan quet a zisenor.

*An Doctor.*

Pe an enor pe ar madou

Eo ar guellâ eus a zaou ?

*Ar Buguel.*

Guell eo brut mat da bep-hini,

Evit caout madou leis an ty.

*An Doctor.*

Hac ar bed-oll a glasq enor ?

*Ar Buguel.*

Couls an Azen hac an Doctor :

Dibaot an den, mar deus nicun,

A so contant eus e fortun.

*An Doctor.*

Petra a gredes-te eus an dut

A so custum da gaout goal vrut ?

*Ar Buguel.*

Dibaot chiminal a voguet

Anez na ye tan en oalet ;

Dibaot en deus goal renom  
Na de clouar, ma na de tom.

*An Doctor.*

Pe oc'h tra e c'heus-te jøa ?

*Ar Buguel.*

Ous un dra vat pa er c'havân.

*An Doctor.*

Petra ar mat a blich dide ?

*Ar Buguel.*

Beza bepret e graç Doue.

*An Doctor.*

Ha te ec'heus choarzet biscoas ?

*Ar Buguel.*

Ne gredan quet em be c'hoas.

Clevet emeus o re c'hoarzin

Na zestumer nemet chagrin :

Goude c'hoarzin e teu gouela,

Goude c'hoari, huanada.

*An Doctor.*

Perac ma remerquer e peb den

Bremâ trist hac ember lâouen ?

*Ar Buguel.*

Allas ! dre ar c'henta pec'het

D'an inconstanç omp oll sujet ;  
 Ha ne ell den mioralamant ,  
 Beza parfetamant contant ,  
 Quen a allo evit biquen  
 Possedi ar mat souveren ;  
 Rac bepret an adversite  
 So harp ous ar brosperite.

*An Doctor.*

Ha te oar ive petra ra  
 Ma zeus cals contant er bed-mâ ,  
 Ha cals all pere ne dint quet ,  
 Carguet a chagrin ho speret ?

*Ar Buguel.*

Ar stad en eus ar c'houstianç ,  
 Peurvuïa a ra an diñeranç ;  
 Rac nep a vev e guir gristen ,  
 So patient en e anquen :  
 Evel Job int contant bepret ,  
 Er c'hlenvet couls hac er yec'het ;  
 Bepret o deveus resignanc  
 D'ar gundu eus ar Brovidanç ;  
 Mæs er c'hontrol an dut mechant  
 A souffr ato diañamant.

*An Doctor.*

Petra eta ne chenchont-hy ?

*Ar Buguel.*

Difficil bras eo distrei :

Coz guezen so drouc da blega ,  
Quent e torre evit heüna.

Un den yaouanc da fall pa za ,  
Ne vella quet evit cozâ ,  
Pe mar chench un draïc bennac ,  
Ne chencho quet a galon vat.  
Ur c'hoz louarn hac èn dare ,  
Guelet ur yar c'hoas a garre :  
An nep na chench a vir galon ,  
A gar ar goal occasion.

*An Doctor.*

Me vel erfat , buguel yaouanc ;  
Ne zeffot quet dit a squiant ;  
Mæs lavar din pe seurt micher  
A guemeri gant an amser ?

*Ar Buguel.*

C'hui so Doctor ha den sayant :  
Liyirit din ho santimant,

*An Doctor.*

Me falfe din , pa zout abil ,  
Rei dit un etat difficil .

*Ar Buguel.*

Difficulte a so partout ;  
Roit di unan dioc'h va gallout .

*An Doctor.*

Me vel ervat ne gueres quet  
Nac ar groaguez nac ar merc'het ,  
Ma ho c'harres , e raes fortun ,  
O timizi couls a nicun ;  
Mæs pa ne ziñt dioc'h da zivis ,  
Ret e dit beza den a Ilis ;  
Ha mar queres en eur redec ,  
Me tesquo da veza Belec .

*Ar Buguel.*

Eus a guemense n'ouï quet dign ,  
Ha ne garan quet eva guin .

*An Doctor.*

Petra vizi-de-ta , Manae'h ?

*Ar Buguel.*

Aon bras eineus u'am be re veac'h ,  
Ar froc a so dies da zouguen ,

Ha me gred êz eus meur a zen,  
 Ma c'hallent o chench oc'h rochedou,  
 A raë franquis er c'houenchou.

*An Doctor.*

Me vel erfat diouc'h da humeur  
 Na vizi quet na Tad na Breur ;  
 Mæs mar queres da viana ,  
 Avocat e c'hilli beza.

*Ar Buguel.*

Ma ven Avocat e ranquen  
 Souten ar gaou hac e zifen ,  
 Ha rei cusul da bep-hini  
 Dious e humor ha faltasi ,  
 Pe autramant em dismeganç.  
 Chom ep plaidi en audianç.

*An Doctor.*

Petra vizi-de-ta , Soudart ?

*Ar Buguel.*

Ne doun quet custum dious an art.  
 Ar Soudardet tout peurvua  
 A zesq laëres , a zesq pill a ;  
 Hounes a so un etat fall ,  
 Ret e clasq din eur vicher all;

*An Doctor.*

Pa na blich etat er bed dit ;  
Ret e din da gaç da Hermit.

*Ar Buguel.*

Roit eta din un hermitach ,  
Ne c'houlennan quet davantach ;  
Rac evit chom etoues an dut ,  
Eineus aon bras n'am be goal vrut.

*An Doctor.*

Pe seurt goal vrut a pezo-de ,  
Mar bevez mat hervez Doue ?

*Ar Buguel.*

Ar bet-oll a so decret ,  
Ha n'o daffe quet faziet ;  
Ar Vcleyen couls ha re all  
A so sujet d'an teodou fall ,  
Ar Venac'h paour er c'houenchou ,  
N'int quet exant dions teodadou ,  
Ar Priedou , ha Tad ha Mam  
A so bepret diudan o blam ;  
Ar groagues ques hac ar merc'het  
A so ganto disenoret ,  
Mæstr ha Mæstres o tempesti ,

Servicher o feneanti,  
 Tud a justiq o ruina,  
 Ar Varc'hadourien o trompla;  
 An Dut Gentil o voual-dreti,  
 Ar Baysantet o vurmuri,  
 N'en deus Itron na Demesel  
 A ve exant dioc'h o zravel,  
 Ar bed-oll so tud fall dezo,  
 Ne chomin quet gante er vro.

*An Doctor.*

Pa ec'heus aon rac an teodou fall  
 Me reï dit un avis all:  
 Studi caër ha bez un Doctor,  
 Den ne doucho ous da enor.

*Ar Buguel.*

An Doctoret couls ha re-all  
 A so sujet dan teodou fall;  
 Enoret ve o c'halite,  
 Pane verd o superbite:  
 Hennes eo viç an dud savant,  
 Caout vanite eus o squiant.

*An Doctor.*

Va buguelic, fouetet viot,

Rac re liger oc'h a deot.

*Ar Buguel.*

Mar bezan fouetet, me so sur,  
 Nep am foueto ne vo quet fur :  
 Perac foueta eur buguel ques,  
 Rac ma lavar ar virionez ?

*An Doctor.*

Ar virionez so cassaüs.

*Ar Buguel.*

Ya dan nep a so cablus.  
 Ret eo lesel nep en deus gal  
 D'en em gavat ha da c'hognal.  
 Nep a gundu goal vuez ,  
 A vezo flemet alies.  
 Parlant a rit eus foueta ,  
 Fouetit oc'h azen da guenta ,  
 Ha miret ho squiant gueneoc'h ,  
 Me gavo guell Mæstr evidoc'h.

**F I N.**



